

DISPUT

ETRE UR VAM HAC HE MERC'H,

PEHINI A FALIE DEZI DEMEZA

DA EUR ZOUDARD PE DA EUR MARTOLOD.

Var un ton joaüs.

AR VERCH.

Va Mam, va demezit, me gar oll tud ar Roue ;
Va Mam, grit an drase ,
Me a gar an arme :
Charmet eo va c'halon pa glêvân tambourineu;
Pa velân ar rejimanchou;
Aneze emeus c'hoant
Da choas un den yaouang.

AR VAM.

Va Merc'h, meurbet oç'h sot da zonjal en armeo,

An dud a parlanto,

Ha chagrin o pezo;

Hep e sonjot en drouc, sur e vezo lavaret :

Homa gant ar Zoudardet

Hag an oll dud a vor,

A gollo he honor.

AR VERCH.

Comzet nep a garo; laqêt emeus em speret

Caret an dud a vor,

Ar re-ze o deus honor.

En instant ma o guelân, e rejouis va c'halon;

Eno ema va mignon :

Anezo emeus c'hoant

Da choas un den yaouanq.

AR VAM.

Va Merc'h, en amzer-mân n'estimer qet ar plac'het

A dal ma vent guelet

O comz gant Soudardet,

Balamour d'o habit, pebini zo scandalus,

D'ar merc'het qen danjerus :

Dioüallit oç'h honor

Eus an oll dud a vor.

AR VERCH.

Va Mam, an dud a vor a zo tud rejouisset,

Merdaidy, Soudardet,

A gontant va speret;
 M'en em fize qent enno vit en un den souchet,
 Godiserien ar plac'het;
 Anezo emeus c'hoant
 Da choas un den yaouanq.

AR VAM.

Va Merc'h, me gafe guell déc'h caout um den a vicher,
 Bourc'his pe baysant,
 Intaon pe den yaouanq.
 Lezit an oll dud a vor, chasseit-y eus ho speret,
 Pe e viot disprizet
 Gant an oll plac'het all,
 Ha laqet un den fal.

AR VERCH.

Va Mam, ar botret/vrao zo e servich ar Roue;
 Mar dint potret Vaillant,
 E zeont insessamant
 D'an arme, p'o goulen, ret è deo oboissa,
 N'o deus gard da rezista,
 Hag anezo emeus c'hoant
 Da choas un den yaouanq.

AR VAM.

Va Merc'h, ar Zoudardet coulz hag ar Vartoloded
 A ra rejouissanc
 Gant arc'hant ar Roue Franc.
 E fin o' champagnou e zeont d'an hostalii,
 Evit en em antreteni,

Da soueta o frusqin.

Va Merc'h, oc'h eva guin.

AR VERC'H.

Va Mam, hac e ve guir ec'h effent peb a vanne
Evit en em recrei,
O deus poan hag anui.

Pa vezont van ar mor, int exposet en danjer,

Ha da bep sort mizerie.

Anezo emeus c'hoant

Da choas un den yaouanq.

AR VAM.

Mar o pe bugale, va Merc'h, pa viot demezet,
Soudard pe Merdead.

Ho rento miserabl :

En a yelo en campagn, hac e vici dilezet,

Setu c'houi abandonet,

Poan o pezo goude

O vaga ho pugale.

AR VERC'H.

Hag em be bugale, va Mam, mar bezont potret,

Evel ma vint savet

Eziat da Zoudardet,

Pe da Verdaïdi, da redec an armeou,

Evel ma ya an troupou ;

Eus an arme emeus c'hoant

Da choas un den yaouanq.

AR VAM.

Va Merc'h, c'houj zo yaouanq, n'oc'h eus nemet
pemzec vloas,

Abredic mat oc'h c'hoas

Da g'emeret eur goas.

Eun daou pe dri blavez e falfe din diferi,

E chomfac'h hep demezi ;

Neuze e ven contant

E qemerfac'h ho c'hoant.

AR VERC'H.

Va Mam, an exersiç, ar sifr, an tambourinou,

An oll rejouissanç

A arme Roue Franç,

A laqa va speret da garout ar Zoudardet,

Hag ar Vartoloded ;

Bremàn e renqân choas

Eus an arme va goas.

AR VAM.

Torit eta ho c'hoant, ha choazit ho fantazi,

Soudard pe Vartolod ,

Va Merc'h, evit ho lod,


Pa zeo guir an arme a ra dêc'h rejouissanç ,

Hag oc'h oll pasetanç ,


Criomp , gant calz a joa ;

Hon diou : VIVE LE ROI

FIN.



S O N
H E R R I - P È V A R,
R O U E A F R A N Ç .



Var ton : *Vive Henri-Quatre !*



N a pebes Roue.
Eo bet H E R R I goechal !
Coulz a ell bale ;
Mes nicun en tu ell

Ne velot morze
En Franç nac e lec'h all.



Ar Roue HERRI
A voa eur pot dious-tu,
A garrie hardi.
E JANNED ha guin ru,
Hac o combati
A vouie cregi dru.



E creis ar gombat
E comzas evellen :
,, Dalc'hit ho lagad
,, Vat va flumachen ven,
,, Sur eo d'o laqat
,, Bepret er guir rouden. ,,



HERRI a garrie
An dud divar ar mèz,
Hac a reqete
M'o dije bep sulvez
Yar er pod deze
Da zebri en o èz.



HERRI-PÊVARE

N'en deo qet maro c'hoas,
 Rac e Vugale
 E lignes hac e raç
 Zo leun a vue:
 Graç deo da chom mil bloas.



Mar distro biжен
 An diaoul da choari vas,
 Prest omp da zouten
 Ar Roue en e blac,
 Ha prest ha laouen
 Da rei peb a dol bas.

FIN.

E MONTROULEZ, e ii LEDAN, e traen ru ar Vur.